

2 Penaos jediñ 27351 : 68 ?
Sell penaos e ra Matilda ha Mazhev.

Evit tostaat ouzh ar c'hosiant e reer evel evit jediñ 273 : 70 ?
Reishaet e vo goude mar bez ret.



$$\begin{array}{r} \text{k d u} \\ 27351 \mid 68 \\ -204 \\ \hline 69 \end{array}$$

4 gwezh 70 a ra 280 dija...
Klask a ran diouzhtu 3 gwezh 68.



Diwall, amañ e vo ret reizhaat. Ha gouiet a rez penaos hon eus gwelet an dra-se ?

Achu labour Matilda ha Mazhev.
N'ankoua ket ober prouenn ar rannadenn.



Desket 'm eus

Pa vez savet ur rannadenn dre 43 pe dre 68 (da skwer) :
- e reer ur **jedadenn nesaet** evit kavout ar c'hosiantoù darnel ;
- da bep pazenn ar jedadenn e tiwaller ma vo **ar rest darnel bihanoc'h eget ar ranner.**

3 C'hoari q ha r kuzh



q = 203
r = 28

q = 213
r = 27

q = 264
r = 9

q = 298
r = 15

q = 304
r = 28

12829 : 43 ?

20601 : 78 ?

6843 : 32 ?

8844 : 29 ?

4 Diskloun ar problemoù-mañ.

1 ▶ En un uzin madigoù ez eus bet graet 28606 karamelenn. Paket e vezont e sec'hier a c'hell monet 47 karamelenn e-barzh.

Pet sac'h a vo leuniet ?

2 ▶ Faotout a ra da 147 morlaer ingaliñ 5071 pezh aour ken etreze.

Petra e vo lod pep unan ?

3 ▶ « Soñjal a ran en un niver. P'en lieskementan dre 62 e kavan 68448. Petra eo an niver-se ? »

4 ▶ Dav eo da Glervi tresañ ur skwergorneg gant ar muzulioù-mañ :
- gorread = 702 mm² ;
- hed ar c'hostez bihanañ = 13 mm.

Pegen hir e vo ret d'ar c'hostez brasañ bout ? (Gellout a rez tresañ ar skwergorneg-se.)

Dont a ran da vout ampart

A Fichennaoueg-poelladennoù, pajenn 19

B Pehini eo an niver tostañ doc'h 1 ?

0,651 pe 1,35

Pehini eo an niver tostañ doc'h 8 ?

7,6 pe 8,401

Pehini eo an niver tostañ doc'h 19 ?

18,71 pe 19,285

1 betek 4 Gellout o deus ar skolidi deskiñ ober gant rannadennoù bras dre 25. Frouezhus eo ober gant rannerioù evel 43 pe 68 evit o c'hustumañ d'ar jediñ nesaet a c'houlenn ar rannerioù-se. Evit kavout kosiantoù darnel ur rannadenn dre 43 (pe 68), e lakaer 40 (pe 70) e-lec'h an niver-se, ar pezh a laka ar c'hosiant kavet da greskiñ (pe da vihanaat). Pa vez lakaet 70 e-lec'h 68 eo (da skwer) e kaver ar farioù stankañ. Pousez eo gwiriañ ez eo ar restoù darnel bihanoc'h eget ar ranner evit chom hep fariañ.